

Etre 1944-1958:

I. Stad ekonomikel ha politikel

- Goude an eil-Brezel-bed: prantad ar puriñ (skarzhiñ ar re o deus kenlabouret get ar renad Vichy)
- Ekonomiezh bresk ha da adsevel
- Ar verrezh, ar revoneizadur (tikedoù lodenniñ boued)
- II. Ar GPRF (gouarnamant da c'hortoz), renet get De Gaulle.

II. Palioù:

- *adsevel an ekonomiezh :
- broadeladurioù: energiezhioù EDF-GDF, Renault, krouet Air-France, tier-bank.
- Steuñvaet eo ar produadur
- Krouidigezh ar Surentez Sokial e 1945
- *diazeziñ en-dro an demokratelezh : dilennadegoù evit ur Vodadenn
- Gwir votiñ d'ar vaouezed e 1944
- Here 1946: referendum evit asantiñ ar Vonreizh nevez

Etre 1946-1958: ar IVvet Republik

- De Gaulle enep d'ar Republik nevez (prezegenn Bayeux) , kuit e genver 1946. Faot a ra dezhañ ur galloud seveniñ kreñv.

I. Distabilted politikel:

- 18 gouarnamant e 11 vlez.
- Prezidanted ar C'huzul (kentañ Ministred) skarzhet meur a wech get ar Vodadenn Vroadel
- Buhez politikel get 3 strollad: SFIO(sosialisted), Radikaled, MRP(Mouvement républicain populaire)

Ar re enep: RPF(Rassemblement du peuple français, gaullisted) PCF(Parti communiste français).

II. Deroù an Tregont blezad klodus

- a-drugarez d'ar Plañ Marshall , Frañs adsavet ha modernizet: karr-nij Caravelle, pont Tancarville(1959)industrializadur, krouidigezh ar SMIG(salaire minimum interprofessionel garanti)
- Saverezh Europa: 1951: CECA; 1957: feur-emglev Roma

III. Kudennoù ar IVvet Republik:

- Brud fall dezhi: renad distabil, nemet René Coty a voe gwellet mat
- Kudennoù an trevadennoù:
 - Brezel Indochina: e 1954, sinadur get prezidant ar Chuzul , Pierre Mendes France, an emglevioù Geneve goude droukziwezh Dien Ben Phu
 - dizalc'h Tunizia ha Maroko e 1956 e peoc'h
 - Brezel Algeria (1954-1962) a lakaas da skarzhiñ ar renad.



Diell 2: adsevel Frañs.



Diell 1: gwir-votiñ evit ar vaouezed (1944)



Diell 3: pont Tancarville



Diell 3: krouidigezh ar Surentez Sokial



Diell 5: PMF(1907-1982)



Diell 4: sinadur ar CECA

<http://www.youtube.com/watch?v=wgqH5OI6PHU>

Diell 3: prezegenn Bayeux

Galvet e voe ar general De Gaulle get R Coty da vout Prezidant ar C'huzul e 1958, goude emsavadeg ar C'hallaoued a Aljeria(mae 1958)

Diviz a reas sevel ur Vonreizh nevez, asantet dre referendum. Ganet e voe ar Vvet Republik.

Blezadoù De Gaulle 1958-1969

I. Bonreizh nevez: savet get Michel Debré.
Asantet dre referendum.

Prezidant ar Republik e-penn ar galloud
seveniñ

II. An didrevadenniñ:

- Da gentañ evit ar re evit an Aljeria gall (“Je vous ai compris” e Aljer e 1958)
- Ar-lerc’h e kemm e soñj: emañ evit an oatodeterminadur: roiñ d’an Aljeriz ar gwir diviz evit o dazont

Fulor eo ar C’hallaoued a Aljeria

> E Ebrel 1961: generaled a sav un taol-diskar-Stad .

➤ Gwalltaolioù lazhus get OAS(Organisation de l’armée secrète)

➤ D’an 25 a viz Meurzh 1962: emglev Evian evit dishualded Aljeria asantet dre referendum.

Ur milion a dud “pieds-noirs” a ya d’ar vetropolenn(“la valise ou le cercueil”)

III. “politique de grandeur”: roiñ en-dro da Frañs he brasder ha he lorc’h

➤ Arme nukleel e 1960

➤ De Gaulle: den an 18 a viz Even 1940: ur lorc’hiñ bras

➤ Politikerezh dizalc’h broadel : kritikiñ a rae politikerezh amerikan e Viet-Nam

➤ Kuitaat a reas Frañs an NATO e 1966

➤ Modernizadur ar vro: en he barr e voe Frañs àr an dachenn ekonomikel(kevredigezh bevezañs)

IV. Darvoudoù mae 1968: emsav studieren e Nanterre

➤ Rummadoù ar baby-boom a nac’h ar gevredigezh re-aotrouniek (interdit d’interdire)

➤ Ledanaet e bed ar vicherourien : harz-labour ha goulenn goprou uheloc’h

➤ Diskoulm: divodet e voe ar Vodadenn vroadel d’an 30 a viz Mae 1968.

1969: referendum àr reform ar Sened hag ar rannvoadur: nac’het get ar geodediz > roiñ a reas De Gaulle e zilez.



Putsch ar jeneraled: Edmond Jouhaud, Raoul Salan, Maurice Challe ha André Zeller.



Sarcelles er blezadoù 1960: divaeziadeg ar maezioù a gas miliadoù a dud er c’hêrioù; Savet e voe er c’harterioù bannlevioù tourioù bras evit lojiñ an holl



Mae 1968: karter latin e Nanterre

Ar gevredigezh gall abaoe 1945:

AR GEVREDIGEZH ETRE 1945 HAG AR BLEZADOU 1960

➤ Kresk ar ganedigezhioù:

baby-boom

Betek ar blezadoù 1960

➤ Kresk bras an enbroñ (ezhommoù dorn-labour)

➤ Kevredigezh beveziñ:

-Kresk ar goproù



Yenez kanerez skinwel oto

-Treuzfurmadur an ti



Sal-dour priveziou

Muioc'h a vakansoù, amzer vak

➤ Mae 1968: bec'hoù

-enep d'ar gevredigezh beveziñ, evit ar frankiz Seksuel, distro d'an natur, MLF (Mouvement de libération de la femme), nac'h ar c'hoñje



AR GEVREDIGEZH ABAOE AR BLEZADOU 1970:

> Digresk ar feur frouezhusted hag ar ganedigezhioù (2 vugel dre vaouez)

> Bevennet eo an enbroñ: enbroñ nemet evit tostaat ar familhoù ha gwir repu hag evit ar geodediz europat àr gresk an enbroñ dre guzh

➤ Treuzfurmadur ar vaouez hag ar familh:

-Pilul(1972) an IVG(1975) : S Veil

-Niverusoc'h int evit labourat

-Muioc'h a zispartioù, familhoù mono pe adsavet

➤ Ar gresk an dilabour hag ar miser

-betek 1997

-Muioc'h a SDFed

-krouet eo an RMI(Revenu Minimum d'insertion)

-felliezh é vrasaat (er bannlevioù, kudennoù sokial bras, lojeiz dihailhet)


➤ Ar gozhaat e ya ar boblañs:

-muioc'h-mui a dud kozh

-Abaoe 2005: ar re ganet da vare ar baby-boom a zo àr o leve.

-- kudennoù al leveoù, dizingalderioù etre ar re a labour hag ar re a zo àr o leve

--dispignoù yec'hed é vrasaat



Coluche e 1985




S. Veil

KEMMOU AL LABOUR HAG AN

ENDRO

➤ Kemmoù bed al labour



1an gennad 2vet gennad 3de gennad

Divaeziadeg : ar maezioù modernoc'h, mekanizet muioc'h-mui

Niver a vicherourien a ya àr gresk betek 1970 (micherourien nann stummet an OS) . Goude 1970 enkadenn industriel, robotizadur an uzinoù

Ar gresk e ya ar servijoù: implijidi er velestradurezh, er c'henwerzh, en deskadurezh, micherioù liberal)

➤ Kresk ar c'hêrioù : krouet e voe lojeiz en abeg d'an diouer a lojeiz (tourioù uhel er bannlevioù , marc'hadmatoc'h er bleadoù 1955 betek 1970.

A-dal 1970: kêriekadur ar maezioù get penntier e-barzh lodennadurioù tost d'ar c'hêrioù evit derc'hel da labourat e kêr.

KEMMOU SEVENADUREL

➤ Digresteniezh

➤ Kevredigezh an dudi

-muioc'h a amzer vak

--39 euriad ha 5 sizhun ehan-labour gopret

-35 euriad e 2000

➤ An dudioù:

-skinwel

-muioc'h a sport

Ganedigezh ur sevenadur d'ar grannarded dezhe o-unan


-Kresk an douristelezh

-< er blezadoù 2000:

-Diorren ar Genrouedad, ar c'hoarioù video, muioc'h a chadennoù skinwel



Sarcelles



Bannlev get lodennadurioù tro-dro Pariz

AR BLEZADOU MITTERRAND (1981-1995)

➤ Ar reformoù e 1981-1982:

- torret eo ar c'has d'ar marv(E. Badinter)
- 5vet sizhuniad ehan-labour gopret
- aotreet eo ar radioioù prevez(NRJ...)
- Broadeladurioù (Paribas, Siant-Gobain...)
- Leve da 60 vlez
- Taos àr ar gourfeadraoù(Impôt sur la fortune ISF)
- Kentañ gouel ar sonerezh(J; Lang)

➤ Enkadenn ekonomikel ha dilabour

➤ Saverezh europat: 1992:
Maastricht

➤ Kenveññ : ur Prezidant a tu kleiz get ur gouarnamant a tu dehoù : 1986-1988(Jacques Chirac) ha 1993-1995(Edouard Balladur hag Alain Juppe)

➤ Àr gresk e ya an tu dehoù pellañ (FN)



AR BLEZADOU CHIRAC (1995-2007)

➤ 1995-1997:tennet eo ar c'hoñje ret

➤ 1997-2002: kenveññ
Chirac-Jospin

An tu kleiz a c'hounez an dilennadegoù lezennek .
Lionel Jospin,sosialour 1añ Ministr.

-35 euriad e 2000

-CMU(Couverture Muteulle Universelle), PACS(1999)

-Àr zigresk an dilabour(emplois-jeunes)

➤ 2002-2007: an eil kefridi
Jacques Chirac

-nac'h kemer perzh er brezel Irak

--reformoù al leveoù, digresk an taosoù

